

DIPLOM BROADEL AR BREVED

RUMMAD AR SKOLAJOU

ESTEZ 2005

ISTOR – GEOGRAFIEZH HA DESKADUREZH AR C'HEODEDOUR

An amproenn-mañ a zo **teir lodenn** doc'h hec'h ober. O-zeir e vo **ret-mat** deoc'h treiñ :

Lodenn gentañ :

Pep kandidat a zibabo ur sujed hepken etre an daou kinniget (Istor pe Geografiezh) **18 poent**

Eil lodenn : Deskadurezh ar C'heodedour **12 poent**

Teirvet lodenn : En em reteriñ war an Douar, kavout e verkoù en amzer **6 poent**

Talet e vo pled gant ar reizhskrivadur hag an doare d'en em zispleg dre-skrid : 4 foent.
Difennet eo implij ar jederez.

9 fajennad, niverennet eus 1/9 da 9/9, a ya d'ober ar sujed-mañ :
kentizh roet ar sujed-mañ deoc'h, sellit ha klok eo (= mard emañ an 9 fajennad a-barzh)

DIWALLIT : un diell-respont eo ar bajenn 9/9 ; ret e vo deoc'h he rentiñ da heul ho kopienn.

LODENN GENTAÑ

Pep kandidat a zibabo ur sujed hepken etre an daou kinniget.

KENTAÑ SUJED : AR BREZEL BED KENTAÑ, UR BREZEL KLOK (18 poent)

Diell 1

An arsailh¹

« Tokarnoù a zibouk e pep lec'h er fozell ha hanter-kant metrad a-zoc'homp ec'h eus dija ur vindrailherez hag en em laka diouzhtu da strakal.

Gwelet a reomp an arsailherion o tonet. Hon artilheri-ni a skop luc'hed. Roc'hal a ra ar mindrailherezed, feññal a ra ar fuzuilhennoù. Ar re eus an tu all a laka bec'h evit araogiñ ; Frañsizion int. Arru int gant ar restadoù orjal dreinek, ha dija e c'heller gwelet o deus kollet tud. Ur lostad anezhe a zo falc'het gant ar vindrailherez a zo etal deomp ; ha neuze e talc'h an arsailherion da dostaat. Unan anezhe a welan o kouezhañ, savet e benn gantañ. Kouezhel a ra e gorf en e boull evel ur sac'h, monet a ra a-dammoù, tre-ha-tre, ken ne chom nemet e zaouarn ha tammoù eus e zivrec'h, bet troc'het gant an tenn, a-skourr doc'h¹ an orjal dreinek.

Deuet omp da vout loened dañjerus. Ne santomp neuze nemet un dra : ec'h eo emañ ar marv o klask war hon lerc'h aze, dindan kement hini ag an daouarnoù-se, ag an tokarnoù-se. Diskiant eo ar fulor en hor c'hreiz : ne c'hellomp ober netra, nemet distrujañ ha lazhañ... »

Hervez Erich-Maria Remarque,
Netra a nevez er Gornôg, 1928

1. *arsailh* : argad.

2. *a-skourr doc'h* : a-istribilh ouzh.

Diell 3

Embann tennet eus ar gazetenn
Le Littoral de la Somme, 21 a viz Here 1916 :

[troidigezh testenn ar skritell :

*Eil amprest an Difenn Broadel.
« Prestit hoc'h argant deomp...
ni a ray-ni àr o zro-int ! »*


*Kef broadel.
Amprest 1916*

Tresadenn diembann.]

Diell 2

An uzinoù Renault e-pad ar brezel 1914-18

Produadur an uzinoù Renault	1914	1918
Otoioù	1484	553
Kamionoù	174	1793
Kirri arsailh (= tankoù)	0	750
Motorioù nijerezed (= kirri-nij)	0	5000
Obuzioù	0	2 000 000
Niver a dud gopraet	4970	21400
merc'hed en o mesk (e %)	3,8%	31,6%



Goulennoù

(8 poent)

Goulenn 1

Diell 1 : kavit en destenn peder zroienn (= peder lâradenn) hag a ziskouez pegen taer¹ eo an emgannoù, ha lârit penaos e tro kalon ha spered ar soudarded pa welont an taerder-se (= penaos emañ o stad-spered, goude bezañ gwelet an taerder-se o tirollañ).

Goulenn 2

Diell 2 : peseurt dilerc'h en deus ar brezel war ar pezh a zo produet en uzinoù Renault ? Harpit ho respont war ur skwer.

Goulenn 3

Dielloù 2 ha 3 : penaos e c'hell an dud war-dreñv² kemer perzh ivez er strivadeg brezeliñ³ ? Roit muioc'h evit ur respont.

1. *taer* : feuls, start ; *taerder* : feulster.

2. *an dud war-dreñv* : an dud n'int ket er brezel, war an talbenn ; an dud disoudard.

3. *kemer perzh er strivadeg brezeliñ* : ober ar pezh a c'hellont evit sikour ar vro da c'hounid ar brezel.

Pennad arguziñ

(10 poent)

Savit – gant sikour titouroù tennet eus an dielloù hag ar pezh ho peus desket – ur pennad war ar sujed-mañ :
« Ar Brezel bed Kentañ, ur brezel klok. »

(Tro 20 linennad)


EIL SUJED :

AN DUD HAG AR MADOÙ
O VONT HAG O TONT MUIOC'H-MUI DRE AR BED


(18 poent)

Diell 1

A/ An ezporzhiadurioù marc'hadourezhioù er bed (1953-2003)








B/ An ezporzhiadurioù marc'hadourezhioù hervez ar rannvedoù (1970-2003)



Mammenn : Bank bed / OBK (OMC) - 2003

Kartenn – An eskemmoù dre ar bed



-  **Koñvers (= kenwerzh) marc'hadourezhioù (e % eus hollad ar c'hoñvers bed)**
-  **Luskoù koñvers pennañ etre ar rannvedoù**
-  **Tud o tivroiñ : redoù pennañ**
-  **Bevenn Kreiznoz / Kreisteiz**

Perak e vez tud o tivroiñ ?

Diwar gwelet er mediaoù skeudennoù o tiskouez miliadoù a dud o vont da glask repu da lec'h all, annezidi ar broioù pinvidik a zo techet da grediñ ez eo ar brezelioù dreist-oll a zo kaoz d'an diblasoù poblañs bras-se [...]. « Gwallennoù an natur¹ » ivez a laka poblañsoù a-bezh da guitaat o bro.

Met e gwirionez, hiziv-an-deiz, kenkoulz ha dec'h, ez eo ar c'hoant gounid e vara a zo pennkaoz d'an divroiñ. An diforc'h live-bevañ etre ar broioù – hag a-wezhoù broioù tost an eil ouzh eben, evel Alamagn ha Polonia, Spagn ha Maroko, ar Stadoù-Unanet ha Mec'hiko – a zeu da vout brasoc'h-bras hag anatoc'h-anat ; hag ar c'hoant da labourat en ur vro binvidik a gas an dud abilañ², er broioù paour, da zivroiñ.

Kompren petra eo an divroañ n'eo ket un dra simpl, tamm ebet : ouzh an abegoù ekonomikel e stag c'hoazh abegoù politikel ha sevenadurel. Ar broioù demokratel a zo, peurliesañ, broioù pinvidik ivez, gant sistemoù deskadurezh diorroet mat, ha sistemoù gwarez sokial³ efedus [...]. Mesket kaer eo ar c'haozioù-se holl, splann eo da gompren.

Hervez MICHEL LOUIS LEVY, T.D.C, Nⁿⁿ 801, Here 2000.

1. *gwallennoù an natur* : ar gwalleurioù naturel

2. *an dud abilañ* : an dud prestañ da sevel embregerezhioù, da ijinañ doareoù nevez da c'hounid argant...

3. *sistemoù gwarez sokial* : sistemoù surentez sosial, gwarant sokial.

Goulennoù

(8 poent)

Goulenn 1

Diell 1 : a) petra a c'heller lavaret, e berr gomzoù, diwar emdro an ezporzhiadurioù dre ar bed, etre 1953 ha 2003 ?
b) hag emdreiñ a ra an ezporzhiadurioù er memes mod e pep rannved ? Deoc'h da harpañ ho respont.

Goulenn 2

Diell 2 : a) peseurt re eo ar rannvedoù a zo mestr war ar c'hoñvers bed ?
b) bez' ez eus rannvedoù, e kontrol, a zo dister-dister o lodenn eus eskemmoù koñvers ar bed : peseurt re int ?

Goulenn 3

Dielloù 2 ha 3 : goude bout lavaret peseurt re eo an tachennadoù divroañ hag an tachennadoù embroañ pennañ, c'hwi a gavo peseurt re eo an abegoù (= ar c'haozioù) pennañ a laka an dud da zivroañ, hiziv-an-deiz.

Pennad arguziñ

(10 poent)

Savit – gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket – ur pennad war ar sujed-mañ :

« An dud hag ar madoù o vont hag o tont muioc'h-mui dre ar bed ».

(Tro 20 linennad).

EIL LODENN

AR GEODEDOURION ER VUHEZ SOKIAL HA POLITIKEL

(12 poent)

Diell 1

Arroudoù tennet a zDiskleriadur Hollvedel Gwirioù Mab-den a 1948

Mellad 19 : Pep den en deus gwir¹ d'ar frankiz d'ober e soñj ha d'en diskleriañ ; da lâret eo, pep den en deus gwir da resev ha da skignañ [...] keleier² ha soñjoù, dre n'eus forzh peseurt doare diskleriañ a zo.

Mellad 22 : Pep den, evel ezel eus ar gevredigezh, en deus gwir d'ar c'hedskor³ [...].

Mellad 23 : 1 – Pep den en deus gwir da labourat, da zibab al labour a gar, [...] ha da vout gwarezet diouzh an dila-bour[...].

3 – An neb a labour en deus gwir da vout paet diouzh e boan ; gwir en deus da vout paet trawalc'h, evitañ hag evit e diegezh da c'hellout bevañ evel tud dign [...].

Mellad 25 : 1 – Pep den en deus gwir da gavout ur live-bevañ dereat⁴ evit e yec'hed hag e aezamant, hag evit re e diegezh [...].

Mellad 26 : 1 – Ar gelennadurezh teknikel ha micherel a zle bout kinniget d'an holl dud ; d'an holl dud, hervez o merit, e vo roet an tu d'ober studioù uhel [...].


1. gwir = droed ; 2. keleier = kevelloù, doerioù, neveztedoù ; 3. kedskor : surentez sosial ; 4. dereat : jaojapl.

Diell 2

Pennad bruderezh embannet er gazetenn Ouest-France, d'ar 17/12/2004

Vous êtes au RMI.


Chaque année nous créons 250 000 emplois Pour vous.



Ministère
de l'emploi, du travail
et des affaires sociales

Dès 2005, un contrat d'avenir sera destiné aux bénéficiaires des minima sociaux. Ce contrat prévoit un temps de travail hebdomadaire de 26 heures rémunéré au SMIC horaire, une formation et un suivi. Il est conclu pour une période de deux ans et peut être prolongé d'un an. Pour tout renseignement sur la réglementation du contrat d'avenir : [0 825 347 347](tel:0825347347) (0,15 euro/min)

Les 20 programmes du plan de cohésion sociale sont disponibles sur www.cohesionsociale.gouv.fr



PLAN DE COHESION SOCIALE. 20 PROGRAMMES POUR VOTRE AVENIR.

* RMI : « Korvoder Touezhiañ Bihanañ », somm argant roet gant an departamantoù d'an dud n'o deus ket mui labour ebet na doare all ebet da c'hounid o buhez.

[troidigezh testenn ar skritell :]

« Touchiñ a rit ar c'hKTb. Bep blez e kroueomp 250 000 post-labour. Evidoc'h. »

Frankiz, Ingalded, Breudiezh. Republik a Frañs. Ministrerezh an Implij, al labour hag ar stagerezh sokial.

« Adal ar blez 2005 e vo ur c'hontrad « amzer da zonet », graet evit ar re a resev ar minima sokial. 26 eur-riad labour bep sizhun, paeet doc'h ar SMIC-eur, stummadur, ambrougerezh. Ar c'hontrad a bado daou vlezad, moaien 'vo en hentiñ get un trivet blezad. Evit gouiet pelloc'h diâr reolenadur ar c'hontrad « amzer da zonet » : N°Indigo 0 825 347 347 (0,15 €/min).

Mar faot deoc'h gouiet penn d'an 20 programm a zo er plan « Stagerezh sokial », sellit doc'h : www.cohesionsociale.gouv.fr »

PLAN « STAGEREZH SOKIAL » : 20 PROGRAMM EVIT HOC'H AMZER DA ZONET

[är an dresadenn]

« Ar stagerezh sokial : tra an holl. »

« Get piv emma skrivet an traoi-se ? »

Pajenn 7/9

Kreisteiz Aveyron : an ospital oc'h en em sevel

[...] Ar politikerezh adorganizañ ar servijoù – en deus da bal kavout un ospital hepken dre zepartamant – a laka, abaoe meur a vloavezh, ospital Saint-Affrique en arvar da serrañ e zorioù ; d'an deiz kentañ a viz Du e oa sañset dezhañ lavaret kenavo d'e servij adreiñ-buhez, d'e servij surjianerezh, d'e rediezh radiologiezh ; ar servijoù-mañ a vefe bet kaset da vMillau.

Ne oa ket na labourerien an ospital nag ar boblañs evit asantiñ da gement-se, ha graet o deus o seizh gwellañ evit lakaat nullañ an diviz-se : manifestet o deus a viliadoù e ruioù Sainte-Affrique ; votet o deus a-vloc'h ; ur medisinour penn-servij, ur pomper, ur glañvdiourez ha div vatezh ospital o deus graet harz-debriñ ; 58 maer ha c'hwec'h kuzulier jeneral o deus kinniget reiñ o dilez a-stroll, ha graet o deus harz-melestriñ. Hag, war an oll, okupet o deus chantier ar c'harrbont¹ uhelañ er bed, [...] ur pezh a simbol evit ar mediaoù, a vez atav o klask war-lerc'h skeudennoù da skoñ ar speredoù. « Ni a felle deomp lakaat keñver-ha-keñver an daou dra-mañ : emae, diouzh un tu, o sevel ar pont uhelañ er bed, ha diouzh an tu all, o leuskel ospital bihan Sainte-Affrique, 20 km pelloc'h, da vonet da goll. » N'eus ket bet a vank : TF1, France 2 hag all o deus graet bep a reportaj.

Mammenn : diàr <http://www.aveyron.com/artisan/hosto.html>

1. *karrbont* : pont hir ha ledan, a servij da lakaat ur gourhent da dreuziñ ur flagenn pe ur stêr.

Goulennoù
(4 foent)

Gouenn 1

Diell 2 : Ouzh piv e sell an diell-mañ (= piv eo an dud intereset gant an diell-mañ) ? Piv en deus lakaet embann an diell-mañ ?

Gouenn 2

Dielloù 1, 2 ha 3 : kavit e Diskleriadur 1948 tri droed (= tri gwir) a zo anv anezhe¹ en dielloù 2 ha 3.

Gouenn 3

Diell 3 : piv eo obererien ar vuhez sokial ha politikel a zo anv anezhe en diell-mañ ? Kavit daou voaien² implijet gante evit kas o mennad³ da benn.

1. *a zo anv anezhe* : a zo pennkomz anezhe.

2. *moaien* : mod ober, feson ober.

3. *mennad* : ar pezh a zo en o soñj ober, ar pezh o deus c'hoant bras d'ober.

kas o mennad da benn : dont a-benn d'ober ar pezh a zo en o soñj ; disoc'h get o fennad.

Pennad arguziñ
(8 poent)

Savit ur pennad war ar sujed-mañ :

« Ar geodedourion er vuhez sokial ha politikel ».

Evit arguziñ, c'hwi a raio al liamm etre an titouroù kenniget en dielloù. (Tro 15 linennad)

**KAVOUT E VERKOÙ EN AMZER
EN EM RETERIN WAR AN DOUAR**

(6 poent)

DIWALLIT : arabat ankouaat reiñ ar follenn-mañ, ur wezh leuniet ganeoc'h !

1. Klokait an daolenn amañ dindan gant ar bloavezh pe an darvoud a vank :

bloavezh	darvoud
	Kouezh Konstantinopolis
1661-1715	
	Dizalc'h India

2. D'ar 7 a viz Du, merdeidi ar Vendée Globe a oa aet war-raok evit ober tro ar bed.

- peseurt linenn heverk o doa treuzet e **A** ?
- en-dro da beseurt kevandir e oant o vont da verdeiñ, pa oant arru gant **B** ?
- e peseurt meurvor e oant, pa oant e **C** ?

